


cholori

num 25



NEDELEG LAOUEN HA BLOAVEZH MAT

CHOLORI, kazetenn viziek evit ar vugale. Nnn 25. Miz Kerzu 1985. 12,00 L.
CPPAP 66052. ISSN 07601085. Embannet gant skoazell Kreizenn Vroadel al Lennegezh.


Savet eo bet an
niverenn-mañ gant:

Divy KERVELLA
Martial LENARD
Malo MENN
Daniel DOUJET
Agnes SIMON
Elen RIVIERE
Yann RIVIERE
Alan DIPODE
Michèle BEYER
Olier MOGN
Silvi DONNART
Marivon BERR

TAOLENN


P.3 c'hoari birou
P.4/5 Lanig ha Loupig
P.6 ar bisig lipous
P.7 ar skeudenn guzh
P.8/9/10 an dour
P.11 Fulupig Fri Furch
P.12/13 an dervenn gozh
P.14 Ilan
P.16 un istor lapined
P.17 gerioù-kroaz
P.18 Nora


P.19 milendall
P.20 taolenn da livañ
P.21 c'hoari
P.22 a bik da bik
P.23 diskoulmoù / gerioù diaes
P.24 bloavezh mat !



C'hoari birou!

Unan hepken eus ar pemp
bir a gas da greiz
ar gwenn.





Alo 'ta, Lanig ! Pres zo warnout evit doare.
Ya, ret din bezañ e skol Diwan an abretañ ar gwellañ...



Ur bellgomzadenn am eus bet digant an Tad Nedeleg. Chomet eo sac'het war hent Sant Jakez. Ret din kemer e blas evit reiñ o frofoù d'ar vugale.
Mont a ran ganit !




Sellit 'ta piv zo erru, bugaligoù ! An Tad Nedeleg, deuet davetoc'h evit reiñ ar profoù
BEVET AN TAD NEDELEG !!!



Evit kregiñ hag evidout, ur c'hoari dispar : "Brezel ar skritur en ec'honder".



Hag evidout-te peadra da lenn : "Buhez Burzhudus ar Buzhug" e teir levrenn — e liv !
na kaer.



Petra 'welan-me amañ ? Ur prof dispar... Ur c'hoari elektronek ! "C'hoariomp gant ar C'hemadurioù"
diouzh ar c'hiz
beuz



Souezhus eo. Ne seblantont ket bezañ gwall laouen gant an holl brofoù-se.
Iskis eo, ya.



FORZH MA BUHEZ !
Un nanarzh evel hennezh an hini eo a fell dimp-holl kaout evel prof !

Nedeleg ar bigg lippen




AR
SKEUDENN GUZH



- gell + ruz △ du ○ gris
- glas □ qwer * melen



AN DOUR ②




Kendalc'homp gant beaj vras an dour...




Sec'hed ac'h eus ?...



C'hoant ac'h eus da stlabikañ dour en-dro dit ?




Arabat lezel ar bleunioù da zisec'niñ !



E-barzh ar stêrioù e vez kemeret an dour ha kaset gant tuellennoù betek ur savadur e-lec'h ma vez puraet. Tremen a ra dre meur a sil rak lous eo dour ar stêrioù. Goude-se ez a gant e hent, miret e vez e-barzh savadurioù all, kaset d'ur c'hastell-dour war lein un dorgenn bennak hag ac'hano betek da di ha ti ar re all. Tremen a ra dre gilometradoù a duellennoù kuzhet dindan ar straedoù. Pa guita an tiez, ez eo bet lousaet an dour ganeomp. Neuze e vo puraet en-dro a-raok bezañ kaset d'ar stêr...

Da betra e servij eta ar c'hestell-dour ???

N'int ket kestell-kreñv
Priñsez ar Stivelloù !



Setu daou lestr liammet etrezo gant un duellenn. Mar diskennez dour e-barzh an hini kentañ ez aio da leuniañ an eil ivez, hag uhelder an dour a vo bepred heñvel en daou lestr. Lakaomp e vefe al lestr 1 ar c'hestell-dour hag al lestr 2 da di : Dre ar sistem-se e sav ingal an dour betek an dar, ar gibell hag ar gwalc'heris !

Yec'hed mat !

Ur gwir vurzhud, 'gav ket dit ?




echu.


10

FULUPIG-FRI-FORCH

Emañ Fulupig e-tal an tan e c'hortoz an tad Nedeleg.



Ur pennadig-kouk hag e karo, sur-awalc'h, pa zihuno, un dra bennak en e votou.



Antronoz rintin ...



... Ur pesk Ebrel !



11


Klemmgan an dervenn gozh

Ur pezh itron gozh a zervenn,
Nouspet kant vloaz en he roudenn,
A glevas 'teufe an heskenn
Da blantañ he dent en he frenn.



Enkrez a oa leizh he c'halon,
He gwrizioù 'bege er c'hondon.
Ha dirak dent ar benveg kriz,
He barroù 'ouele d'o frankiz.

An dud, 'mezi, zo didrugar
I a fell dezho ma diskar.
Me 'roe dezhañ gwaskedenn,
Ma ferchenn 'gas din e heskenn!



Evelkent 'm 'o ket re a geuz,
Mar rankan mont diwar ma c'hleuz
Gant ma'z in da flammañ c'hwek
En oaled, deiz an Nedeleg.



ILAN

NALO AR MENN



un istor lapined



16

GERIOU KROAZ

1 ur vro divent, hir ar goañvezh enni.

2 Diwall da risklañ !

3 Ar vugale a sav bouloù gantañ diouzh ar goañv.

4 Na tomm, na klouar.

5 Miz kentañ ar bloaz.

6 LAOUEN

7 Kemer da zisglavier.

8 Ne weler netra !

9

10 Dañjerus evit ar c'hirri.

11

12

13 ...da dommañ da Varijan.

14

17

NORA ar skiantourez vihan




PERAK NE GOUEZH KET AR YER PA VEZONT O KOUSKET ?

Ar yer, evel al laboused all, o devez ezhomm da gludañ evit kousket. Dre anien e chomont kempouez war o c'hud. Gouest int d'en em staliañ warnañ o lakaat rik ar memes pouez a bep tu dezhañ. Ha setu perak ne gouezhont ket.

PERAK E CHOM ALIES AR GERC'HEIZ GANT UR PAV PLEGET ?


Dibluñv eo pavioù hir ar gerc'heiz. Ret e vez dezhi chom difiñv pell-amzer en dour yen a-benn pakañ pesked. Riv ne devez ha suizhañ a ra ivez dre forzh chom e-giz-se. Un diskoulm he deus kavet ar gerc'heiz d'ar gudenn-se : P'he devez c'hoant da ziskuizhañ, pe da gousket, ne laka nemet ur pav en dour, o cheñch ur wech an amzer, evel-just !



BRRR! YEN EO



Keuneud zo da zastum, bugale!
Biv a garo an hent mat ?




TAOLENN
DA LIVAN




PESEURT GER ZO BOUTIN
D'AN TRAOU-MAN

dihuner


TITIRING!



ti



labous



erc'h



...a bik da bik...

e kavi ur babig...



22

- DISKOULMOU
 P.3 : ar bir Nnn 3
 P.17: 1 Kanada
 2 Skorn
 3 Erc'h
 4 Yen
 5 Genver
 6 Nedeleg
 7 Glav
 8 Reter
 9 Latar
 10 Riell
 11 Mantell
 12 Ski
 13 Tan
 14 Koumoul
 P.21: Dremm an ti
 Dremm an dihuner
 Pluennoù an erc'h
 Plu(ennoù) al labous



EVIT AN NEDELEG,
 EVIT AR BLEZ NEVEZ,
 PROFIT LEVRIOÙ AN HERE
 HA KOUHANANTIT HO
 MIGNONED DA CHOLORI!

GERIOU DIAES

KONDON: an douar don.
 PRENN : koad
 ROUDENN: merkoù bloaz a weler
 war kef ur wezenn troc'het.
 DIDRUGAR: drouk.
 EC'HONDER: an egor, e-lec'h
 m'emañ ar stered.

DIHUSTELLOÙ ar boulom
 KAROT

Ul labous bras
 gwenn, melen pe glas,
 ne fich ket e zivaskell,
 met nijal 'ra ha mont
 pell!



23

R : an e' korn m'...

NEDELEG LAOUEN! ha BLOAVEZH MAT!



A-berzh skipailh Cholori

- 135 L ar bloavezhn- 70 L er 6 miz.
- 120 L adal an eil kousmanant.
- Koum. skoazell, adal 150 L.
- Broioù estren: 1 bloaz 155 L.
6 miz 80 L.

CHOLORI
Agnès Simon
29, straed Dixmude
29260 LESNEVEN

Chekenn en anv AN HERE



AN HERE

Renerez ar gazetenn: Marivon Berr
Moulet e ti z/Kloatr, mouler e
LANDERNE, Gournent N 12,
29220, SANT TCHAN.

Copyright evit an holl
tresadennoù ha pennadoù
gant AN HERE - Kemper.
1985.